

Tousigi Breizh-Izel

Koulizh Kedez

Da c'houbannwel-noz e vez ankeniet an tousigi e Breizh-Izel. War dreuzoù an ti emaint, mantret gant steuzidigezh ar goulou. Na lentik ez int e-barzh raskornig stern an nor, gant ar re vihan – bugale koshaet re abred – tre ouzh ar voger, kuzhet a-dreñv o mammoù rous. War gil ez eont pa zigorit dezho. Pistri an noz a borzhont re vat, pistri an noz a zegas al lazh hag an dilez. Mut e vanont – diougan glav enni ken a lak da sevel notennoù unton ha damani o c'han – hogen warc'hoazh e vo devezh ar sec'hor ruz, ar balberezh hag ar bulluc'h. Bod ne c'houlennont o c'houzout re vat e ren an drouziwezh, e teu a-benn ar bresk eus ar flosk ha ned eus tamm louzou ebet ouzh losk an hiraezh.

diwar Ouzh eien ar gaouded

Emb. An Treizher, 2000

